

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**
d'hon douar, roit peoc'h an neañv !

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.
Setu Oan Doue, an hini a lam pec'hedoù ar bed :*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion :

- | | |
|---|--|
| 1 Jezuz, pegen bras eo,
Plijadur an ene
P'arriv glan dirak Doue
Hag en e garantez ! | 7 Hag eno aveit mat
E welin Doue anTad,
Get e Vab, Roue an neañv,
Ha get ar Spered-glan. |
| 2 Me 'gav berr an amzer
Hag ar poanioù dister,
É soñjal noz ha deiz
E eürusted an ne. | 8 Me 'welo ma Jezuz
Dous ha karanteus,
É lakaat àr ma fenn
Ar gaerañ kouronenn. |
| 3 P'en devo an Ankoù
Torret ma rañjennoù,
Me 'savo en amzer
'Vel ma ra un alc'hweder. | 9 Na kaeret 'vo gwelet
Ar Werc'hez benniget
Get an daouzek sterenn
A ra he c'houronenn. |
| 4 Pa vin pell doc'h an douar,
Devalenn a c'hlac'har,
Neuze me roy ur sell
Doc'h mam bro Breizh-izel. | 10 Ni a welo oc'hpenn,
Gete pep a delenn,
An Aeled, Arc'haeled
Holl é veuliñ o Doue. |
| 5 O deiz mil gwezh eürus,
En neñv pa zegouezhin,
Peh kan melodius
A bep tu a glevin ! | 11 Na kaeret 'vo gwelet
Hon tud, hon amied,
Hag a bep stad, bep oad
Ar Sent ha santezed ! |
| 6 Me 'vo degemeret
E palez an Drinded,
E-kreiz an enorioù
Hag ar c'haerañ lidoù. | 12 O eürusted hep par
A-vremañ me ho kar :
E poanioù ar vuhez
C'hwì 'roa din levenez. |

Kan-dibenn :

Gwerc'hez santel, a lein an neañv,
Ho pet truez doc'h hon eneañ ;
Sekourit-ni en hon dober,
O Mamm tener, o Mamm tener.

Amañ hiniv, holl daoulinet,
Gwelit, o Mamm, ho tud karet :
Dait int get feiz d'ho enoriñ
Ha d'ho pediñ, ha d'ho pediñ.

Grait ma vezimp bepred gredus
Aveit kariñ ho Mab Jezuz ;
Distagit-ni azoc'h an douar,
O Mamm hep par, o Mamm hep par.

O Mamm beuzet get ar glac'har,
E-tal Jezuz àr ar C'halvar,
Grait ma vezimp bepred fidel
D'ar Groaz Santel, d'ar Groaz Santel.

Parrez KerAnna

Gouel an Anaon / 2 a viz Du 2025

Kan digor :

- | | |
|--|--|
| 1 Kristenion vat, hon amied,
Ec'h omp er Purgator dalc'het,
Hag a-werso gwall dilezet :
O ! Ni ho ped : hor sekourit ! | 3 Hor poan amañ a zo brasoc'h
Aveit ne fezomp lâret doc'h ;
Ec'h omp e pinijenn kalet ;
O ! Ni ho ped, hor sekourit ! |
| 2 Kerzhit ma omp bet e buhez,
Doc'hoc'h hon eus bet karantez !
Bremañ doc'homp divat ne vet :
O ! Ni ho ped, hor sekourit ! | 4 E-pad mende eo geneoc'h bourrus,
Ec'h omp en ur stad truezus,
Hep arsav ec'h omp kastizet :
O ! Ni ho ped, hor sekourit ! |
| 5 A bep tu deomp n'en deus 'meit tan,
Tan diàrlue, diañnoù tan,
En e greiz ec'h omp ariet :
O ! Ni ho ped, hor sekourit ! | |

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwì hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwì hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwì hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwì hepken a zo santel. C'hwì hepken a zo Mestr. C'hwì hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a Levr ar Furnezh.

Eneañvoù an dud reizh a zo etre daouarn Doue, ha n'eus gwask ebet evit o zihout. An dud diboele o deus kredet o gwelet é vervel ; o zremenvan en deus seblantet bout ur gwalleur, o disparti a-zoc'homp bout un distro d'an netra. Ma kred an dud o deuz añduret kastiz, int avat a zo gwalc'het get esperañs an divarvelezh. Goude dezhe añdur kastiz dister e resevint madoberoù bras, rak Doue en deus o amprouvet ha kavet dellezek anezhañ e-unan. 'Vel an aour teuzet en teuzlestr en deus o amprouvet ; 'vel un aberzh parfet en deus o degemer. An deiz ma tay d'o gwelet e vint hollskedus 'vel elfennoù tan é redek àr un troc'had plouz. Barniñ a rint ar broadoù

ha reniñ a rint àr ar pobloù, hag an Aotrou a vo o roue da viken. Ar re a lak o fiziañs ennañ a gompreno ar wirionez ; ar re fidel a chomo e-tal-tañ er garantez, rak e drugarez hag e c'hraas a zo evit ar re bet dibabet getañ.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 129 :

1 Ag an toull don ha teñval, o man Doue, 3 Àr e gomzoù emañ harpet m' eneañ ;
Savet em eus mam bouezh, selaouit me. Ennañ hepken ma fiziañs a lakan.
Plijet geneoc'h, hiniv, plegiñ ho penn, Ag ar mintin bet' ar mintin goude,
Da selaou mam bouezh ha ma fedenn. Fiziet atav, fiziet en Aotrou Doue !

2 Doc'h hon evrou mar sellit ken pervezh, 4 Doue hor C'hrouer 'zo leun a vadelezh,
Piv er bed-mañ a vo kavet dibec'h ? Ne glask netra 'meit hor salvedigezh ;
Met C'hwi 'zo mat, C'hwi 'zo leun a druez ; Getañ hepken e vezimp holl salvet ;
Rak-se me 'chom harpet àrnoc'h, man Doue ! Hor pec'hedoù getañ a vo gwalc'het.

5 Bremañ enta, roit dezhe, o man Doue,
Diskuizh ha peoc'h, skaerder ha levenez ;
Roit enta peoc'h d'holl ar re tremenet,
Ma vint en Neañv eürus geneoc'h bepred.

Cil Lennadenn : Lennadenn tennet a **Lizher an Apostol Paol d'ar Romaned.**

Ma breuder, hini ebet ac'hanomp ne vev evitañ e-unan, na hini ebet ac'hanomp ne varv kennebeut-all evitañ e-unan. Mar bevomp eo evit an Aotrou e vevomp ; ha mar marvomp eo evit an Aotrou e varvomp. Evel-se, pe é vevin pe é vervel, eh omp enta da Zoue . Rak evit kement-se emañ marvet ar C'hrist ha daet en-dro d'ar vuhez evit bout Aotrou ar re varv kenkouls 'vel Aotrou ar re vev. Rak an holl ac'hanomp a ranko monet dirak lez-varn Doue 'vel mad eo skrivet : Ken gwir evel mah on bev, eme an Aotrou, pep glin a zleo stouiñ dirazon ha pep teod a zougo klod da Zoue. 'Vel-se pep unan ac'hanomp a zaskoro kont da Zoue evitañ e-unan.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yann..

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Aviel : En amzer-hont, Jezuz a lâras d'e zisiplad : «Na laoskit ket ho kalonoù da vout nec'hañset. Krediñ a rit e Doue ; kredit ivez ennon-me. E ti ma Zad eh eus paotmat a lec'hioù ; pa ne vehe ket 'vel-se e vehe, n'em behe ket lâret deoc'h : E yan da gempenn ul lec'h deoc'h. A pa vin aet kuit hag a pa 'm bo kempennet ul lec'h deoc'h, me a zay en-dro ha m'ho kemero genin, 'vit ma veet c'hwi ivez 'vel ma vin-me. Gouiet a rit e-men e yan, ha c'hwi a anav an hent. Thomas a lâr dezhañ : «Mestr, ne ouiomp ket e-men e yit ; penaos e c'hellahemp-ni gouiet an hent ?» Jezuz a lâr dezhan : «Me eo an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez ; hini ne ya da ma Zad nemet drezon-me.» En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : *Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Ha get ho spered !

R/ : Emañ troet trema Doue !

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv, Aotrou Krist savet da vev, Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad :

hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vinnantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : Ha get ho spered !